

INSTRUCTION

VAR

AR GUIN-ARDANT.

LAQUEAT E RIM.



Effejou a brodui var ar c'horf, var ar ræson a var
-an ene : digareziou an everien guin-ardant distrujet en
eur façon curius, sclear a comprenabl d'an oll : sort
reservet er bed-all d'an everien guin-ardant, prouvet
dre ræsoniou tennet eus ar scritur sacr : moyenou ac
obligation da dec'het diounta en despet d'an oll di-
gareziou.


Experto crede Roberto.

-An in'en deus ouspen mil guech tânveet ar memes souben,
-A dle gouzout pe vlaz eo, peautramant ne oâr den.

E LANDERNE.

E ty DESMOULINS Imprimer-Librêr, ru ar Pont.

1849.



INSTRUCTION

VAR AR GUIN-ARDANT.

Var ton : GUERZ JUDAS, pe var ton : son Jⁿ. M^o. BENOUER.

1^a Coupl.

Va selaouit quement ini so c'hoas capabl d'am c'hompren,
 -Ac arabat' da zen fâcha, ma commañcan evellen ;
 -Rac darempred a rit brema eur ch'amarad peini
 En deus lamet he zantimant digant tud quer fur a c'hui.

2.

Discâr a ra er frap quenta tud so quer c'hrèn|a Samson,
 Renta'ra foll en un instant tud quer fur ha Salomon,
 -Lacat'ra da goll ho honor merc'het quer chast ha Suzaan,
 -A tud quer santel ha David a string e pechou Satan.

3.

-A clevet emeus lavaret eo antreet ebars er vro,
 -En deus lazet meur a ini, a n'os-peur e finisso,
 Ne chomò den eus e zilac'h na digentil na bourc'his,
 Na paisant nac artizan, na memes den a Ilis.

4.

Brema oc'h-eus c'hoant da c'houzout petra eo ar Monstr-ze,
 -Rac, aon oc'h-eus dija razan eb gouzout c'hoas petra e ;
 -Hebient hanvet eo guin-ardant, treac'h d'ar Roue Attila
 -A laque e tan, e ludu, ar c'herriou dre ma'zea.

5.

-Ac e teuer d'am alia un d'en quen dister ha me,
 Da vont va unan d'attaqui un aneval ar seurt-ze;
 Eürus c'hoas da renta servich, em be c'hoant bras da zenti
 -Oc'h tud, nemet d'ober ar mad n'int bet biscoàs din ali.

gnizic en traou d'ar menet 6.

-Habil dre an experianç, me am bije quempenet,
 -A depeignet deoc'h ar Monstr-ma, ne rache guël d'en ebet;
 Mæs, siouas din! Bet va unan quer ouâl laqueat ganta
 Em c'horf, em speret, em ene, n'oun quet petra rin brema.

7.

skedriç
 Petra raën me nemet goulen assistanç demeus an êe
 Da zont da zupplei d'am memor, da zicour va bolonte;
 Mæs courrouçet vel ma seblant o velet crimou ar bed,
 A gant eur pe'cheur eveld'ôn e vezo en dizarmet?

8.

-Mæs, nespèet d'am indignite, ha d'am oll zempladurez,
 M'en em adresso gant fizianç da Vari va Mæronez,
 -E deus dija græt din santout e meur a occasion
 An effejou crèn ha nerzus demeus e frotection.

9.

Deuet eta, ô Guerc'hes Santel, d'am siçour da zepeigni
 Ar maleuriou ac ar c'hrimou zo e c'heul an audevi,
 -Evit ma teui va c'henvrois, da bere ispiçial
 -Eo, ec'h adressan va rimou, oc'h ar monstr-ze da zioual.

10.

-Mæs gouëzit, ô va Mam dener, un assistanç ordinal
 Ne ve quet ama suffisant, rac ar Monstr zo infernal;
 Mæs an affer zo important, ha va c'haos so mad,
 P'eus question eus ho cloar ac eus a ini ho Mab.

11.

-Rac-se daoust peguen indin on, peguer simpl, peguen
dister,
A peguer c'hren an adversour oc'h pini emeus affer,
-O conta var oc'h assistanc, me ya var eun d'abordi
A da gregui, dreist e zillad, er c'habiten audevi.

12.

-Pa velan eur pastor deved o tiscar eur Goliath.
-Un arme a Bersianet laquet er mæz a gombat
-Gant eur vanden fibu dister, a me elfe disfiziout
Eus a brotection un Doue so infint e c'halloud.
azo fer braz

13.

-Goude beza graet va fossubl, croguet a anter gourvez,
A grog collier ac an treverz, a c'haolliat-soun alies,
Ma na ellan gant va izign dont a ben d'en distruja,
-Me lâro d'an oll e grogou, vit ma tiouallor ounta.
brasse co

14.

-Mar bezan quer ouâl laqueat n'ellin mui combatti,
-M'en em denno en hospital, a lacaï va fançi,
-Ac'vel eur soudard decidet da c'hounit pe da vervel,
-Eur vech pare va goulou, me zistroï d'an duel.

15.

-Quenta ma teuas guin-ardant, audevi ebars e Franc,
Ne grede den e implija nemet gant cals a brudanc,
A c'hoas var an anevalet, da bançi ho c'hlenvejou
-Pa veze c'hoant d'o faredi, pe da zevi ho griziou.

16.

Hirio ezeo deuet da veza eur remed universel,
-A cals tud a ev anezàn memes-tra evel dour-vel,
Eb dont d'ober reflexion en deus e-unan lazet
-Niver brassoc'h a dud eguet quement tra all zo er bed.

17.

-Tec'het a rit dioc'h eur serpent, quercouls a dioc'h eur
c'hi-clàn,

An hano memes eus eur monstr n'eus bet biscoàs anezan,
En deus o laquet da grena, ac eur veach bet taguet,
-Ar güel ebquen eus eur c'hi yac'h o lacafe da redet.

18.

Ar güel memes eus un toussec, -pe eus un aër-viber,
Loënet zo util d'an douar a ne noazont quet nemeur,
-En deus meur a vech marteze o laqueat da scrija,
A græt deoc'h cregui e mein en avis dont do laza.

19.

Mar oc'h-eus en ho mechossi eul loën-tig anavezet,
-Ne gredit quet tostât ^{er}ounta gant aon da veza taguet,
-A biquen james ne lessac'h, o c'houzout e arvechou,
Un den, memes un adversour da dostât oc'h e c'hinou.

20

Caërroc'h a livirin deoc'h, ac en anzao a reot,
-Güella marc'h zo en ho craou eb dale pell a verzet,
-Mar dê deuet dre eur ouâl chanç eur mignon deoc'h
da laza,
Abalamour n'ellit mui souten ar güel anezan.

21

Accordi a ran gueneoc'h e tleer caout un tam aon
Rac an tigret, ar serpentet, rac an hyenn, al leon,
Ispicial rac ar chass-clàn, rac græt o deus victimou,
-Ac ober a raënt d'avantach, ma na ziouallet outo.

22.

Remerquit ama gouscoude penaus an anevalet,
Mar guellont attaquai ar c'horf; an ene ne ellont quet,
-E lec'h ar monstr a zepeignan, pa sco un taol a zoare,
A gustum frigaça ar c'horf, a laza mort an ene.

23.

Hebien mar ra al loënet-ze un tam benac a ravaj,
 Ar monstr a bini e comzan a ra mil guech davantach;
 Evit er güelet, consultit eb mont larcoc'h tud ho ty,
 A tennit ar gâoz, mar guellit, var articl an audevi.

24.

-Ne quet niverus ho famill, ma na gavit quet enhi
 Un daou pe dri zen ac a dle ho maro d'an audevi,
 E lec'h marteze, dre c'hraç Doue, ne glevot hano ebet
 'Ve bet nicun eus ho querent gant loën furius lazet.

25.

Eus ar victimou maleurus a beris var an hencho,
 Credit parfet ar guin-ardant en deus e lod anezo,
 Ac oc'h unan a zo marvet dre ataq un aneval,
 Cant nemet unan zo coëzet dre grog ar monstr-infernal.

26.

-Petra so caos peurvuia eus ar c'hlenvejon rust-ze
 -A gass dreist peb tra er vro-ma niver bras a dud d'ar be,
 Evel ma' zeo ar c'hoëno, pe c'hoas an apoplexi,
 -P'en derchen tiphoid anvet, tamallit an audevi.

27.

peb lec'h
 -Baleit partout dre Vreiz-izel, ac e cafot meur a zen
 -Abars ho c'hosni mac'hagnet, dishenor ar raç-humen,
 A mar goulennit diganto perac int quer languissant,
 E tleont respont : quement-ma a dleomp d'ar guin-ardant.

28.

Ar güel ha memes an hano eus ar redont o laca
 'Da scrijal, memes da redet, n'ouzoc'h p'heur dont dioc'h
 ema,
 -Mæs, marteze, p'o p o güelet penaus e trêt ar ræson,
 E teuot da guemer razan a-la-fin francoc'h aon.

29.

- Un den taguet gant ar monstr-ma a ra mil a mil arvez,
- E zaoulagat a zo troët, raouillet oll eo e vouez,
- Yudal a ra evel al leon, ac an ïonen a zedd *bas*
- A beb tu demeus e c'hinou evel pa ve arraget.

30.

- +Avichou e cousq' vel eur broc'h, ac e ve creïs al linot,
- Ac o pe mouez eur stantor, foelt-biquen n'en diyunot,
- Avichou ne gousco berad, caër o p o sarmon dezan,
- Quentoc'h, cals, e pacac'h neuze eur grabanad digantan.

31.

- Danvez en deus evel crezus, la nerz, n'oar den pegument,
- Eur banne o p o diganta, ac eur javedad querquent,
- E zeis a zo d'en em beïllat, ac en ober a raïo,
- Ma na gav den da gombati, e raï brezel d'ar c'hleuzio.

32.

- Quement tra so en e guerc'hen estranch meurbet a veulo,
- E dog-a-poil, e gravaten, ac e roched-caligo;
- Ne vo guer eus e zivesquer, nac eus e dreïd leun sclabez,
- +Gant aon na raffent dezan' vel d'ar peün re a vez.

33.

- Guëlit-en var bord eur ganol pini ne ell da dremen
- Dre ma'ze bras ar reverzi, ac ar môr en e c'hourlen,
- En drolite eo e velet o sarmont d'an elemant :
- Pini a dle, var e veno, senti ounta pa gommant.

34.

- Avichou en eur zortial eus a demplou e Zoue,
- E fervor a bado ganta eur ouâl bennad goudeze,
- Ac, abars errüt er guæar, e raï meur a stouaden
- En honor d'ar monstr infernal a zo c'hoas en e benn

35.

-Güelit-en'bars en e famill en noz d'ar guær pa zistro,
 Peb tra en ty so var e hent, e vugal'a quement-zo,
 A marteze e rencot chom d'assista an oristal -
 Hed an noz da ziræsoni eb gars ebet da fioual.-

36.

-Un tam leve en deus guerzet, it da c'houzout penaos,
 -Na pegument, rac e-unan n'er gouie quet en tro-noz,
 +E vir-feach, ac e dachen en deus ive angaget,
 -Rac epad ar pemzec dervez ne quet bet divorfilet.-

37.

-Ac ar c'hreg petra lavaro pa glevo an ouïdel? -
 -Petra elf-i da lavaret? Edo e c'heul an drobel; - *troupeel*
 Ne quet ama'ma ar c'hoari, emai o vont da gommanç,
 Rac quic sall a iða a-foizon, amàn-coz en abondanç.-

38.

-Quenta tra a raï Jacqueta er guærar pa erruo,
 -Eo bizita quelorn e e'hic, peini a gav goullo,
 -E fodad amàn zo ive rognnet caër a ouanet,-
 -It da c'hout brema gant piou, a penaos e bet laëret.

39.

-Huissierien a yelo en hent, explejou a yel en dro,
 Ar reont a raï ho dever, unan benac a beo,
 -A p'heur ec'h echui an affer? Pa ne chomo mui netra
 Oc'h corf an daou zen maleurus zo en em roët da eva.

40.

Guëlet o poà e dieguez, ne vanque enña netra,
 -Eer, quirri, saout a quezec a sternach ar re vraoa,
 Tieguez ebarz er barrez noà eveltan florissant,
 Hebien emaint disparisset, eat da heul ar guin-ardant.

41.

- Coullou ive erru ganta, 'vel pa felfe da Zoue
- Lamet digantan ar voyen da beurlaza e ene;
- Mæs quement-se, 'lec'h digueri d'ar Mezier e zaoulagat,
- Ne ra nemet e galedi muoc'h mui ac erjouassât.

42.

- Quement int a quen dishêvel ar follenteziou a ra,
- Ma ve red tri menat paper 'vit o rapporti ama,
- A m'ar continu da eva, a da henti e vignon,
- E teui à-la-fin da goll evit james ar reson.

43.

- Evelse en hospitaliou el lec'h ma vez destumet
- An dud a ranquer da staga, collet ganto ho speret,
- Eus ar re a veler eno en eur stad quen truëzus
- An darn-vuya zo digaçet gant ar boësson maleurus.

44.

- Guëlomp brema ar ravajou a exerc var an ene,
- A contemplomp pegueit e za e valiç var ar poënt-ze;
- Ar c'hrimou a lesmajeste, ar muntrou ar re vrassa,
- Ral eo ma vezont commetet aneztavàn anezan.

45.

- Petr'en doa poulzet Fieschi da forja e instrument
- En avis laza Loïs-Philip, nemet fò ar guin-ardant?
- Beo evije c'hoas marteze hor Prinç an Duc-de-Berry,
- Paneved ma oâ bet trempet ar poignard en audevi,

46.

- Petra zo pen-caoç hirio demeus an oultriachou
- Ac eus a gals a grimou all ne garfec'h quet da zelaou,
- Noc'h-eus nemet interrogi a beb tu an hostizien,
- Ac e tleont respont: ac'han o deus tennet ar sourçen.

47.

An ozac'h-ze neus quet, oual-bell quen estimet er barres,
 -Zo hirio gant an hostizien disclapet eus ho zyez.
 -Abalamour de zisurchou, a ra euz, memes horrol
 Da botret n'int quet scorpulus, da vinistret e idol.

48.

Evit ma vezo ardisoc'h d'accomplissa e zessin,
 An den impudic, libertin a evo eur banne guin,
 En entent a rit, guin-ardant, rac eguile ne ro quet
 Na tost, affronteri ema da dostât oc'h ar merc'het.

49.

Gouscoude, caër en devezo a-unan gant Lucifer
 Rodal en dro d'ar plac'h yaouanq, gout a ra mad e dever,
 -Mæs, mar guel e chessa ganta ebars en hostaleri,
 Quenavezo d'ar chasteté, emàn en e agoni.

50.

Ar guella moyen a implij evit coll an eneou
 Satan, eo lacat er barres eur plac'h yaouanq pe ziou
 -Douguet da eva guin-ardant, rac, mar stign mad e gripet,
 E tle bemdez caout de lein a de goan, labouçet.

51.

M'en deus Doue crouet ar matier da ober ar guin-ardant,
 Vit invariant e bet certen e conseil an ærouant;
 +Evelse ive, pa ratont gant ho ardou ordinal,
 O deus recours d'ar guin-ardant vel d'eur voyen disparail.

52.

Cetu aze un tyeguez reglet-mad mar doà un all,
 -Buez ar sant, graçou d'ho foënt, ne doà enha custom fall,
 Brema, er plaç ar pedennou a veze græt e commun,
 -E vez c'hoariet ar c'hartou bemdez epad ar zizun.

53.

Ac e plaç an dud a façon a zaremprede an ty,
 Neus enha nemet canfartet ato prest da forbani;
 -A petra en deus digaçet un evelep chenchamant?
 Ar c'hreg ac an ozac'h a ev gant ho daou-zourn guin-ardant.

54.

An ty-se n'eus quet ouâl bell c'hoas anvet ty ar rozera,
 Nemet blasphemou, malloziou ne glever pelloc'h enha,
 -Mæs livirit din, eme-c'houi, perac eur seurt chenchamant,
 -A ne ouzoc'h-u quet ar c'hreg a gav-mad ar guin-ardant.

55.

-Guëlit ar Mæreur-se quer stard a quer ferm en e lezen,
 -Gaër en dezo e vestr fuc'hal, a terri dezan e benn,
 Biquen james ne gonsanto voti'vit un den mechant,
 -Nemet roët e ve dezan abars commanç, guin-ardant.

56.

-Un den yaouanq ne vez james er gabuduill, en ebad,
 -Ma roër dezan guin-ardant, ractal a lamo e c'hoad,
 -Reï a raïo un taol-craban, a marteze daou pe dry,
 A fonta raïo gant ar vez, tremenet an audevi.

57.

Mæs allas! flemmet ezeo bet, ac ar vilim a bado,
 Ac el lec'h dioual a tec'het, quenta, batail a vezo,
 Ne vezo quet da ziveza, oc'h en em gaout var ar plaç
 En avis cavout e remed el lec'h m'en deus bet e c'h laz.

58.

Rac un dra eo'zeu da zalla, ha memes da galedi,
 Noc'h quet prest da gonvertissa un den a ev audevi,
 Ac evit guëlet quement-ma, clevit ama o parlant
 Missionerien a ra brozel e peb bro d'an ærouant :

59.

« Convertissa' reomp eb poan tud eus ar re e'houassa,
 « Muntrerien a laëron-touet, torfetourien ar brassa,
 « Mæs' vit el lec'h m'en deus stignet ar guin-ardant e louzou,
 « Eo couls deomp ober hor pacat, ha laret quenavezo.

60.

« Güelet a reomp dre ama meur a gristen generus
 « Condaonet da goll ho buez pe da renonç da Jesus,
 « Ac eus a bevar-varnuguent assemblez o combati,
 « Mar deu unan da goll courach, eo an ever audevi. »

61.

-Güelet oc'h-eus eur stantillon eus ar c'hrimou diffarant,
 -Eus ar maleuriou eb niver, zo e c'heul ar guin-ardant,
 A m. ar deuit goude quement-ma da zarempred ho mignon,
 Noc'h quiet 'vit lavaret eve dre faot a instruction.

62.

-Anzao a reomp, a livirit, ac en anzao a rancomp,
 -Or beuz tor o tont da eva audevi 'vel ma reomp;
 Mæs hirio eo deuet da veza er vro-ma quen necesser
 -Eo impossubl tremen eb-tan pa vez un affer d'ober.

63.

-Eur marc'had a zo da ober, un tam queuneu da brena,
 -Eur marc'h zo da vont d'ar foar, pe eur mevel da c'hopra,
 An traou-ze a c'houlen evach, a ma na roit eur banne,
 Ne reot quiet a varc'had caër, bezit sûr a guement-se.

64.

Ar charreadec'zeu goude, ac a c'houlen adarre,
 -Evit ober an traou er regl, un nao pe zec banne,
 -Quen a vo ar charretourien orel o vont d'ar gear,
 -Peautramant en dro guenta, dibaut e ma caffac'h carr.

65.

An termen a zeuio ive ma vo tennet d'ar billet,
 -A n'eus forz penaus e tennor, en em vesfi a zo redd,
 +Ar billet güen evjt disquëz ne quet el lourin eo,
 -An ini du, evit trec'hi ar boan-speret en dezo.

66.

Cetu az'eur soudard yaouanq o tistrei eus an Indes,
 Daou vloas zo dija tremenet n'or boa trinquet assambles,
 -A, credabl, ne quet divalo e raffemp eur stagaden.
 Abaoue n'oamp en em gavet da rinça pint la güeren.

67.

-Cetu aze un arvoriad da bini ezon dleor
 -Eus va buez, eus va madou, edont lounquet gant ar mor,
 -Anez ma teüas d'en em risqua, inspiret gant e æl-mad,
 -A da zont en un neuaden bet'er garrec d'am c'herc'hat.

68.

Neb ne roffe quet d'ar seurt-se eur roulladen guin-ardant,
 N'en deus nac ene, nac henor, ouassoc'h eo evit un tyrant,
 -Un den en deveus saveteet deoc'h ho tanvez, ho pue,
 Ne dleffe quet beza, credabl, tremenet gant eur banne.

69.

+Deis ar beür-sourn a zo ive eur, ouâl dervez evidomp,
 -A ne quet re eur chopinat 'vit pepini ac'hanomp,
 Rac en dez-se bras a biän, oll eus ranquet labourat,
 -Ac a grêfe gant ar sec'het ma n'o de-_{ve} peb a gorfat.

70.

-Un articl all a zo c'hoas a zo er barr d'ar reña,
 -Deis ar voti, da viana, ne pec'het da zen eva,
 -En deis-ze, ne quet pouillouchen a ro deomp eur banne,
 -Mæs tud a zanvez, a leve, tud ar c'henta qualite.

71.

-Vit lavaret ar viriones, me gaff sot-magn an ini
 -Ne raffe quet en dervez-se eur stagaden audevi, *trinquet*
 Pa' zeus a beb ta d'an Ilis hostaleriou forant
 A ro quement a ma queront d'ho c'hliantet guin-ardant.

72.

Tentet òn memès da gredi ~~eye~~ obligation
 -Dindan boàn a bec'het marvel, da antren en eur bouchòn,
 -Rac, anes, an dud a faëçon, ac y a roffe arc'hant *anvren*
 -D'ho mignonet evit tenna tud da eva guin-ardant?

73.

-Evidõn-me, eme un all, a ell eva discorpuñ,
 Me zo contant da baria ec'h evàn cazi beb zùl
 Eur voutaillat eb e sant-fe christen em be bet berad,
 -Ead litrat mad'yaffe memès ganèn en un alanad.

74.

-Cetu aze digareziou a zistruchfen gant eur guer,
 Ar guin-ardant, a livirit, a zo brema necesser,
 la necesser d'an neb a garr, bez'eus tud quer fur a c'hui
 A ño devezus biscoas james tãveat an audevi.

75.

-En traou-ze oll me ne velan nemet eur groug-lass stignet
 Gant Satan en avis paca ar re'zeu d'en darempred,
 -Daõust hac ho contrat a vezo cals diessoc'h da derri,
 Pa vezo bet mastarennet gant beradou audevi? *soùlle*

76.

Sellit brema oc'h ar paourquez gant peini ~~eye~~ oc'h bet
 -Un dervezic o charreat, cetu int-en rivinet,
 E alùzen eus ar sizun zo cêt en ho pouzello,
 -Ac ar guin ho peveus lounquet, gant petra er paëo?

77.

En guirionez red³ en anzaou, cavet oc'h-eus ar voyen
 -Da drugarecât hor Salver da veza tenaet e guen,
 Dont er c'his-ze d'en em ruilla, trec'h d'ar baïanet guechal
 -A henore ho Doucou dre beb seurt arvechou fall.

78.

Distro eo ar soudard yaouanq, pini'c'halvac'h ho mignon,
 -Ac evel ma teu dirazoc'h, c'hui a ro dezan poëzon,
 -Anes an arvoriad, credabl, n'edoc'h mui er bed-ma,
 -Ac evit e recompançi, c'hui'ya var-eün d'er laza.

79.

-O pebes desolation güelet an dudigou queiz
 -O c'hoëzi an dour, ar goad, o tourna epad an deiz,
 D'an noz, evit oll recompanç o tont d'en em zistruja
 -En eur chom betec anter-noz ac ouspen da gorfata!

80.

-Deiz ar voti, a livirit, ne quet difennet eva,
 Pa'zeo an dud-a-fæçon eo, a zeu da baëa,
 'Vel pa ve semploc'h eur poëson roët gant un den pin-
 vidic,
 -Eguet na ve ma ve roët gant eur paourquez reuzeudic.

81.

C'hui'gaffe ive, me bari, sot-magn al labouç pini
 Chomfe var ar bod da gana, el lec'h en em regali
 -Assamblez gant e gonsortet'zo e penn ar bern-colo,
 -O pipa ar greun zo eno laquet expres evito.

82.

-Gouscoude kema zo libr, a richoun, a richouno, *gouscoude*
 Et lec'h e gonsortet queiz, zo er gaouët pell a zo;
 -Ac'hanta-ta, potret, piou en deveus græt ar güella,
 Pe kema o chom da zellet, pe'r reont o corfata?

83.

Pa gomzit a bec'het marvel, me gred eus unan caër
 Fournissa armou, ha beza a-unan gant al laër,
 Ac ec'h c'halvit tud-a-fæçon, tud ne glascont en dra-ze
 Nemet ho frofit o-unan, bezit sur a guement-ze.

84.

En guiriones a possubl eo credi e teuffé Doue
 D'approuvi un election trémenet er fæçon-ze,
 Nemet, ar pez zo eur blasphem da lâret, n'en deffe c'hoant
 Da lacat d'or gouarn cheffou distrempet er guin-ardant.

85.

Evit an ini diveza ameus comzet agezan,
 -A ra e bompad da louncaed litrat eb distaga,
 -Me zift den da exprima ar spont, an euz, an horrol
 -A dle da inspira memes d'an dud muia direol.

86.

-En guiriones ac o peffe eur marc'h eus ar re vella,
 -Mæs quer gourmand var an dibri'vel m'ema var an eva,
 Ne zalefec'h quet d'er güerza, pe d'er laza marteze,
 -Dr'en abec n'ellit quet maga anavalet ar seurt-ze.

87.

A ne quet ive d'ar seurt-se en deus Doue adressed
 -Ar c'homsiou-ma pere, siouas! zo re nebeut meditet :
 « Malheur dec'hu, punçou satan, saillou diès da garga,
 « A bad-fe epad an deiz, epad an noz da eva. »

88.

Brema, m ar deuit da c'houlen diganen petra zeui
 -Da vez'an niver infinit en em ro d'an audevi,
 Me roïo deoc'h e berr gomziou eur respont benac tennet
 Eus a levr ar scritur santel e pin'emeus y lennet.

89.

- Ma ranquer, ervez Sant Paol, douguen pepini e zamm,
 - Ar Mezier dle caout eur ouâl vec'h, rac ato dza de lamm,
 - Ac alies ec'h apparis eb dizama tam ebet
- Dirac an dribunal derrubl e pelec'h vezo barnet.

90.

Mar deu Doue d'en em vengi, 'vel ma lâr ar c'hatekis
 -Demeus ar re ho devezo en em roët d'ar gourmandis,
 Petra ne dle quet da c'hortos al lounquerien audevi,
 Ne cessont da ev'anezan, quen a sorti dre ho fri.

chamant

91.

- Mar bezer, ervez Sant Paol, barnet dioc'h an œuvrou,
- Credabl, potret ar guin-ardant souëzet en em gavo,
- Pa velint ho oll dizurchou, ar scandal o deus roët
- En ho famill, en ho farres la partout el lec'h mint bet.

meubl

92.

Ar greun o pezo gounezet, ar seurt-ze a zestumot,
 Ma nahadit nemet ivre, nemet ivre ne gafot,
 Comziou Sant Paul ezint ive a ro sclær da bepini
 Da entend ar sort reservet d'an everien audevi.

93.

Mæs ne quet red deoc'h estoni m ar deu Doue da bunissa
 En eur façon an estrancha monstrou evel ar reïna
 Pere, e leac'h e adori evel ma tle pep christen,
 A depp memes eus e demplou e vell' adoraturien.

94.

Noc'h-eus nemet chom en Ilis da ober ho pedennou
 Un nebeut goude an ofiç, dreist-pep-tra ar gousperou,
 Gant ar musiq a-vez gâto o commanç ho antienen,
 -Ne ell den harpa en Ilis, na vezo torret e benn.

95.

Ac ar gousperou ma, a båd cals pelloc'h vit ar reont.
 Sounet unnec-heur, anter-noz ac ouspen pa echuont,
 -Epad an amzer-ze, credit, eno' vez dramuduillet
 -Chapeledou, Litaniou, Litaniou-Brest anvet.

96.

An traou-ze oll, a livirit, a zo re ziræsonabl,
 Control beo da lezen Doue, a memes abominabl,
 -A ne quet ze a fell deomp; mæs regali eur mignon,
 -Petramant un den da bini or beus obligation.

97.

Hebien caout a reot guin guen, ha guin-ruz en abondanç
 A rejouis calon an den pa vez evet gant prudanç,
 A lavar deomp ar scritur sacr, a ma na vez quet contant
 -Ar personnach a regalit, ouâz a ze, ne quet prudent.

98.

Ar guin ruz a zo eur boësson approuvet gant mab Doue,
 A græt en deus en e faveur eur miracl e Galilee,
 Sant Paul er recommand ive' vit conservi ar yec'het,
 -Ac evit lâret an ofern, guin guen pe vin ruz zo red,

99.

à l'effacement
 Ac'hanoc'h oc'h-unan memes ec'h-ellit consideri
 -Eus cals a guem etre'r guin ruz, ac an treitour audevi,
 Unan, d'an den a ro yec'het, un all a lam ar vuez,
 -Ar squiant-vad ac ar ræson, a laz an ene memes.

100.

-Guëlit ebars en ho parrës, eus ar pennadurechou,
 Per'en em gompport ar güella, ha'ra güell ho afferou,
 Pe an everien audevi, pe ar re ne reont quet,
 Ac e velot quercouls ha me n'eus comparæson ebet.

101.

Ne gred-fen quet prononç ama've collet quement ini
 -A effe goude ho repas eur veraden audevi,
 Gouscoude e cavan estranch e teue an den da eva
 -Eur breuvach'ra quement a zroug, eb ober vad da netra.

102.

-Tec'hit eta, me o suppli, tæc'hit dioc'h ar guin-ardant.
 A mar-doc'h commañcet ganta, renonçit antieramant,
 Ounnes eo ar voyen unig da veva eürus er bed,
 Da gonservi yec'het ar c'horf, ha sclérijen ar speret.

103.

-Pa viot tentet da eva, ho pet sonj en anaön,
 -Sellit oc'h ar beurien gueiz zo e c'hlaouri gant an naön,
 -Rannit etrezo an ovranch destinet d'ar guin-ardant,
 HA güelit ennoc'h oc'h-unan ha ne viot quet contant.

104.

-Ar re a gar an interest, ac e zeus meur a ini,
 E leac'h plaçi ho arc'hant ebars en hostaleri,
 Placent-en en un hospital etre daouarn seurezet
 A ro ouspen tri mil dre-gant var ar soum a vez roët.

105.

Oc'h arc'hant'zo en assuranch, an interest a zo ral,
 -Touch a reot er memes tro interest ha capital,
 -Emañt etre daouarn eur mestr ne ell quet mancout de le,
 -Ac a recompañc atao en tu-all d'ar pez a die.

106.

-Goulennit digant un hostis eb-mui-quen ho capital,
 Da velet ha ne viot quet bafouet ganta ractal,
 N'en devezo quet a scorpul oc'h ober deoc'h banquerout,
 -HA gant un taol troad pe zaou o casso prest en ho rout.

107.

-A quement-ma zo erruet n'eus quet ouâl bell en hon touez
 -Gant eur paour queaz quemeneur en dôa placet e zanvez
 -En hostaleriou ar Bourg, a pa' zeas dô goulen,
 -E oûe darbet dezân beza lazet gant an hostizien.

108.

Ia, mæs, eme Urbanic, ma na ran' vel ar re all,
 -An oll a raï goab ac'hanon, an oll a zeui d'am zamal,
 -Ac e teuan da eva ivevel loumic evel ebquet,
 -Evit non pas dizoblija nac offançi den ebet.

109.

Hebien paourquez Urbanic, mezo sûr a guement-mâ,
 -Den na vezo scandilizet dre ma chomes eb eva,
 -Er c'hontrol an oll a lâro : Urbanic a zo un den,
 -Ne da quet gant coz-guin-ardant da goll e ræson, e benn.

110.

-Avichou all, eme Urban, e chesser quement varnôn,
 -Ma rencân eva eur banne, pe renonç crenn d'eur mignon,
 -Nac avis-mad hivisiquen n'am bezo mui diganta,
 -Balamour ma'meus refuset antren ganta da eva.

111.

-Hebien, passe mall oâ dît renonç d'er seurt cammarad;
 -Ar re a ra quement-se deil, peurvuia ne-dint quet mad,
 -Difich atao eus eur mignon a glasq contragn da eva,
 -Reï a ra sclear da entent ne glasq nemet da drompla.

112.

-E avizou a dle ive beza avizou truillec,
 -Rac, credabl, ne ro anezo nemet pa vez tom de vec,
 -A ne quet diez divinout an avizou a sorti
 -A c'hinou tud a vez tomet gant corfajou audevi.

113.

- Evit eur plac'h ac a roffe din ar seurt digareziou,
- Ractal e lavarfen dizi : gant ar vez serr da c'hinou,
- Rac m'ar tiouëz dit dre waleur prononç eur seurt gui-
naouat,
- E roi d'an oll d'anaout eo eved da scudellat.

114.

En eur finissa va rimou, Guerc'hes m'o trugareca
 Da veza roët din sclerijen da gompozi quement-ma,
 Mæs, p'hoc'heus va sclerijennet da gompozi va rimo,
 Grit ive dre ho madelez ma profitor anezo.

115.

- Grit ma teui an oll da ziuall, ar re fall da renonç-crenn
- En eur ober ho oll fossubl evit terri ho chaden,
- A m'ar deus izom a virael²vit eul loden anezo,
- Dac'üstla ne ellit quet ober, pa blich gueneoc'h, miraclo?

❧ FIN. ❧

